

KANTIK

EN HENOR DA ITRON VARIA-AR-PORZOU.

4.

Salud deoc'h, Mari, rouanez
Euz an env hag an douar ;
Salud deoc'h, mam a drugarez,
A greis kalon ni lavar :

DISKAN.

Itron Varia-ar-Porzou
Clevit mouez ho pugale ;
Hed hor buez en hor poaniou,
Hon diouallit nos ha de.

2.

Choazet a beb eternite,
De veza mam da Jesus ,
Lezet oc'h da vam deomp ive ;
C'hui hon rento oll eüruz.

Itron Varia, etc.

3.

Lec'hioù santel a zo merket
Da henori ar Verc'hez :
Eno e skuil varnomp bepret
Tenzorioù he vadelez.

Itron Varia, etc.

4.

Chapel ar Porzou zo brudet,
Dre ar burzudou dispar,
A ra ar Verc'hez binniguët,
En andret an nep he c'har.

Itron Varia, etc.

5.

Evit dont dar C'hastelnevez,
Pelerinet, gant guir feiz ;
Da henori guir vam Doue ;
A dreuz pevar c'horn Breiz.

Itron Varia, etc.

6.

A leiz an henchou ho gueler
O c'herruout a bell bras,
En eur bedi daoust d'ho skuisder
Daoubleget var ho fenn bas.

Itron Varia, etc.

7.

Darn a deu d'he zrugarekat,
Euz ar grasou ho deuz bet.
Darn all a c'houlen eur mennad ;
An oll a ve selaouet.

Itron Varia, etc.

8.

Evidomp-ni oll Bretonnet
A lavar a vouez huel :
Kent evit mankout d'ho karet,
Ni ve guell ganeomp mervel.

Itron Varia, etc.

9.

Dirag hoc'h imach benniguët,
Er Porzou ni a bedo :
Pa vimp tentet pe glac'haret,
Gant fians ni a gano :

Itron Varia, etc.